

L. I. C. & M. I.

JANNED ARK, GWERC'HEZ

KANTIK AR VIKTOR

Kanomp, kanomp holl, Breizis, ha gloar ha meuleudi
D'ar Verc'h zantel' roaz frankiz da "Rouantelez Mari,"—
Bennoz c'hweg d'ar Plac'h garet e d'euz, dre c'hras Jesus,
Ar Frans, hor Bro, diframmet euz eur sklavaj mezus!

Jann d'Ark, euz barr an Nenvou, oh! klevit hor peden :
Pedit Jesus, hon Aotrou, da weled hon anken..
Ar Frans' zo braz he enkreuz, hirio evel gwechall :
Bezit hon difennourez, oh! Jann, deuit d'hon diwall!

Oh! Jann, ma teuit adarre d'ar stourmad d'hor bleina,
Ni' vezo treac'h heb dale d'enebour ar Vro-ma :
"Ar zoudarded' n em ganno' vel tud leal ha fidel,
Hag hon Doue a roio ar Viktor d'hor Banniel!"

Pedit, Jann d'Ark, oh! pedit evit hor zoudarded,
Hag' vit-ho holl goulenit Baradoz pe iec'hed,
D'ar re varo Baradoz, e Bro al Levenez,
Ha d'ar re-all ho pennoz, e'r gear en hon touez!

Fidel da Zantez Anna, ha d'hor Zalver Jesus,
Ha d'an Intron Varia, holl ni' vo aketus,
Jann d'Ark, da ren eveld-hoc'h eur gwir vuhez gristen,
Hag holl ni' varvo kentoc'h eged pec'hi biken!

Kanomp, kanomp a-zevri da Jann d'Ark a Lorren
Henor, gloar ha meuleudi hirio ha da viken!
Bennoz dreist-holl d'an Drinded, tri Ferson e Doue :
Ra vo He Hano meulet e peb leac'h ha bemde!

AMEN.

POST † CARD

Ce petit cantique, composé par le R. P. TRÉBAOL, O. M. I.,
a été approuvé par l'Autorité diocésaine de Quimper.

Il peut se chanter sur l'air de : *C'hui pere zo kristenten, ha ne
gleit-hu ket?* (Kantikou Eskoptu Kemper, Tón-No. 81).

S'adresser (30 c. la douz.) à l'Interpr. G. M. TRÉBAOL, O. M. I.,
Area Commandant's Office, Rennescure, Nord, France.

